



102
2
Pèvar den eus ar re vraye, corfou caer ha tud vaillant.

Ervocant Jacob a lare en deiz-se d'e gamarad :

Emàn a zo un devez trist hac a ra din calonad !

Guelet va mam baour o ouela ha va zad qèz desolet !

Va c'halonic ebars em c'hreis zo dija qazi rannet.

Calz a sonje d'è, marteze, penos e ven eur poltron,

Em be aon rac un ten fuzil pe rac eur vouled canon,

P'otramant aon rac ar fatiq, ô vale dre an henchou,

Pe gousqet var eur guele can ebars er c'hordegarchou.

Dougued a vadillad var va chouq va fuzuil ha va zabren,

Bale bende a gær a gær dre ar fanq hac ar vouillen;

Ha goude, e fin va beach, ranqout marteze campì,

P'e gousqet var an douar men, pe otramant bivoaqi.

Evit guelet va bolonte ha va inclination;
FOR OI US AN EP 2 CONCH c'halent lèn em c'halon

Ma na fosse nemet va goad, me en scuille tout joaüs

Evit souten hon impalaër, un tad qen carantezus !

Piou na gombatfe qet hardi gant un impalaër christen !

Eur gos qen just hac e hini a zo facil da zouten ;

Pa zomp memprou da Jesus-Cbrist, soudardet an aviel

Bugale da Zoue an tad, templou d'ar Speret-Santel.

Arça eta, camaradet, qent quitat eus hor c'hontre,

Deomp-ni da ilis Plouillau da suplia hon Doue

D'hor prezervi demeus goel chanç pa vezimp en armeou

Ha da gonsoli bars er gær hon tadou hac hor mamou.

Adieu dèc'h, Autrou Sant Millau, patron eus ar

baros-mâ;

3 *Jo 3*

Adieu, qerent ha mignonet, cessit bréma da ouela :
 Pedit Doue hac ar Verc'hes da gavet soign achanomp,
 Hac hon Æl-mad d'or e'hunduo partout elec'h ma zefomp.

Adieu, va mab, va esperanc, eme an tad dezolet ;
 Piou a gonsolo da dud paour goude ma vi partiet ?
 Pa vin accablet gant cosni, me vo clêvet o laret :
 Ma vije va mab qez er gær, en dije va soulajet.

Clêvit ar vam o qinviadi ive digant e buguel :
 Deus amân e'hoas ma e'hambrassin ur vech qent evit
 mervel ;

Ahen ma retorni d'ar gær, me vo ét eus ar bed-mâ :
 Deus amân etre va divrec'h evit ar vech diveza.

A guichen ar moment fatal ma e'heus tennet d'arbillet,
 Bemnos vel ma sot din couquet, me a seblant da volet
 O lont eus eur gombat sangiant, var ar chariot e'lesset,
 Pe tolet en un hospital gant an oll abandonet.


Ar soudard yaouanq contristet e'hoas qent evit partia,
 Evit essât o e'honsoli a lavar, en eur ouela :
 Tavit, va zad ha vamam haour, ha bevit en esperanc :
 Doue, tad a vizericord, a zo bras, e brovidanc.

Goude ma vo fin d'ar brezel ha goneet ar victoar,
 Gant grac Doue hac ar Verc'hes, e vezo fin d'ho clac'har,
 Evit merq eus hor vaillantis, gant lore eus hon toqou,
 Ni a retorno prest d'ar gær evit sec'ha ho taelou.

Adieu da baros Plouillau ha d'e oll habitantet ;
 Adieu d'hon oll anaoudeguez ha qerent ha mignonet ;

Ha ma na niem p qet ar bonheur' er bed-mà d'en em
 velet,
 Craç deomp ebars er barados assambles d'en em gavet.

FIN.



10

AR C'HONSCRI YAOUANQ.

Var ton : *C'était un conscrit d'Corbeil.*

DERT da selaou va c'hlanmou,
 Ha va tulanadennou;
 Rac n'en deo qet hep rêson,
 Nan, hep rêson, nan, hep rêson;
 Rac n'eo qet hep rêson
 Eo glac'haret va c'halon.

Me a voa em plijadur
 Er bourg demeus a Blufur,
 Pa glêvis an tabourin,
 An tabourin, an tabourin
 Pa glêvis an tabourin,
 A ras din calz a chagrin.

Eno voe guelet neuze
 Oll gonscriet ar c'hontre,